

# DAMON HA HERIET

## Chanson moral

Voar ton : *Ton humeur est, Catherine...*

Tud yaouank tener a galon  
Me propos d'ech vit model  
Daou den, Heriet ha Damon,  
Da veza fur ha fidel;  
Gar ho zourmancho in trec'het.  
Dre o vertu, ho c'houraj;  
Erfin, da veza unisset.  
A deus bet an avantaj.

Heriet, sûr, a disquenue  
Deus eur baron renommet;  
Ha Damon, oa, deus eul ligne  
Ivo ancien meurbet;  
Ar plac'h oa yaouanc ha caer,  
Ar potr a oa evel moulet;  
Ho daou oant eur melezour scler  
Deus ar guir amourouset.

A denerediguez carguet  
Damon eur zul, d'ar mintin,  
Gouze beza devot cleyet  
Oufen eur c'hapucin,  
A n'emp rent en ty ar baron,  
Poli bras, lenn a douster,  
A lavar : « Me a zo Damon »  
Ma recevit vit map caer.

— Evidoc'h den braou ha galant,  
Ma merc'h na vo birviken;  
Dreg eur c'hrill an Oll buissant  
A vo he fried hepquen.  
Ma meubl a priçussa,  
Hac aour bars an abondans!  
N'ho possedo den er bed-ma  
Met ma map en assurans.

— Ah ! miret ho pinvidiguez  
Lac oupen ho ténsoniou,  
Na breiantant cavet james  
Nep lod aneze outro;  
Ma peus aour, me meus ive  
Sulfis, herve ma souhet;  
Eus ho traou holl na fell din-me,  
Met possedi Heriet.

Ar baron coz hac impoli  
A dec'h 'neur c'hija he benn,  
Hanval euz eun tad meurbet cri  
A tro prest deza he queir;  
Hac en no harlec'h a treinas  
D'eur gouënt pel ac'hane  
Ar plac'h nep cavet fot bisceas  
N'emet he fidelice.

© trista separation  
Vit amouroujen tener!  
Tourmentet bras eo he c'halon  
En pep lec'h en pep amzer;  
Caër a neus Damon bale  
Varlec'h he zouc' Heriet.  
En nep leçon na oa doare  
D'ar plac' lech ma zeo curet.

Mez ar vam superiores  
A dalc'h d'he distrei a grenn;  
Parlant a re dezin hep cess,  
Deus an habit, a reglen:  
« Quemerit ar voil promptamant, »  
Ornit he pisaj ganti;  
An elez dreist ar firmamant  
Neuse gano meulodi.

— Ah ! Itron superiores.  
Destumet ho badennou;  
N'allant quet dre zempladurez  
Cousesan dindan ho lancou:  
Da eur chans muioc'h evurus  
Doue a neus ma galvet,  
Da Damon, mignon vertuzuz,  
Me vezo fidel bepret.

Deus an Allemagn eo'h erru  
Gant ar baron eur lizer?  
Evit annons deza, dious-tu,  
A zeo maro e vap quer,  
Pehini, evit guir on bet  
Courajus bras er gombat;  
Mes er fin oa bet discaret,  
Hag a rencas seuil e voad.

Ar baron pa lenn al lizer,  
Ne cess da houelan;  
D'he val a seuil dacro tener  
Balameur d'he varo cri.  
« Me a moa miret emeza,  
Evidout cals a vadou;  
Heriet zo venget brema,  
Dre buissans an Envou. »

An deiz varlec'h a parias  
Vit gouelet d'ar gruënt.  
« Ma merc'h me meus disesper bras  
Me fell din coll ma squient!  
Doue a deu d'am panissa  
Deus ma re a grucide;  
Evidout elec'h coll bren a  
Vo ma mrec'h muia caret. »

— Ma zad, peira a'hoare  
Ma zoo'h quoment chagrinet?  
— Da vreur na man quen en bue  
O combat ti eo lazet;  
En Allemagn o rei zouten  
D'ar roue leun a gouraj;  
Ha d'am c'honsoli, na chem den  
Nemet to... pas d'avantaj.

— Er moment ma, ma zadie quez,  
Me ho ped da arretin  
An objet deus ma c'harantez  
Bremen ma accorfet din.  
— He vuez, abaoe pell amzer  
Ma merc'h a neuvez collet  
En Itali, a leverer,  
Er plac' Castella hanvet.

O chans leun deus a grueldet!  
Ah! ma mignon zo maro,  
He vuez a zo tremenet,  
Me neus quet fin d'am deizo!  
Destinadurez rignouras,  
Har c'hos tad cri ha barbar,  
Ho calon neubeut truezus  
Evit biquen ho separ.

Adieu! ma zad paour eta,  
Adieu ma mignoneset,  
Me finisso er gouent ma.  
Ma devojo da donnet  
Oll blavejo trist ma bue,  
Dindan habit eur seureze.  
Vo laquet do bedi Doue  
Da bardonna d'am zad quez.

Ah! Itron superiores,  
Eun habit promp ma ho ped,  
Rac eun desir zantel am press  
Da veran deuz ho deaved;  
Troc'hit buan ma bleo melen,  
Pere moa quement soignet,  
Hep conservi eur seoulin hepquen;  
Ma c'harantez zo collet.

Adieu-ta ma muian curet!  
Evit ar vec'h divezan,  
Pa sonjan ennoud, ven mantret  
Da boan zo collet breman;  
Adieu eta ma c'halonnie,  
Hanval ouz an durzanet,  
Goude ma vezia maro aic,  
Me vezo c'hoas dit fidel.

Heriet efa ze novie :  
D'unn bras e ze meurbet  
Penos ve dindar eu silie  
Coachet quemet a c'henet.  
He zad a neveys bolonet  
D'he lemel deus ar gouent,  
Mez maro eo e c'harante :  
Eun ze birviquen na zent.

Mez eun de hepquon justanant,  
Aroc e profession,  
Quas dre eur burzud patant,  
C'evit gant attention :  
Ebars en pep lec'h na gomzer  
Met deus eur c'haptif prenet,  
A galite yaouanc ha caer  
Deus an Turki retornet.

En pevar c'horn quer na glever  
Comz met deus an esclav coant ;  
An oll a den d'he diguemer,  
Ha gante peb a bresant ;  
Ha memet an itronezet.  
Meurbet tener dre natur  
A sauil daero pa deuz clevet  
Kappori he avantur :

Beto ar superiores  
A neus desir d'hen guslet ;  
En eur momet pep leanca  
D'ar parlouer a direl.  
Pervuia chome Heriet  
Ebarz eur gambr a goste,  
Mez dre eur monamant secret.  
Hi ze n'em tentative.

« Captif brae contet-hu din-me.  
Eme ar vam leanez,  
Petra den d'oc'h accabli,  
Rac me meus ouzoc'h truez.  
— M'ho ped, itron, ma excuset.  
N'oullan quet presentamant.  
A ve ma c'hano disaleriet ;  
Me zo digentil yaouanc.

A greis ma c'halon me garie,  
Eur plac'h yaouanc a wravoan ;  
Hi he unan, deus he c'hoste,  
Am c'here sur a gredan ;  
Drouc contant eo e zad cruel ;  
Coilet neus ma c'harante :  
Arlevet neus ma douz fidel.  
Eun devez deus ar beurro.

En pez anderet a zeo coachet,  
Leverit tad rigourus  
Epad seiz vicia meus-hi clasquet  
En mli plas danjerus ;  
Partout na ran nemet bale ;  
Clasq a ran hep esperans  
Ar feumeulen die eun de  
Laquat fin d'am oll souffrans.

Eur c'horser coz am quemeras  
Hac am gueras hep true ;  
Ma c'halon sincer a chomas  
Ha fidel en amitie  
Beza neva eur plac'h charmant  
Hac an c'hoantas da bried ;  
Mez elec'h bezan inconstant.  
Cals a boan a mous souffret.

D'ar fin homman ze bot facher.  
Pa deuan d'he refus :  
En tuont d'eur blavez eo bet  
Crenn ous ma fersecuti :  
Dre heurz on bet obligat  
D'al labouriou rustan ;  
Me n'em gaf meurbet affliget  
O pronons a guirion ma.

Ma bue oa ochu quasi,  
Me a desire mervet  
Pa n'em gavas bars an Turki  
Nombr deus ar venec'h santel ;  
Evit terrin ma chadennou  
Gant Doue oant digasset.  
Mez sort na gouant ma peziou,  
Mar n'am be quet Heriet.

Dave al leannez yaouanc  
Dre an discours-se troublant  
A renq cavet sicour hep manq.  
Digant an oll seurezet.  
Gant eul lagat a ra eur sell.  
Lavaret a ra n'eur grens :  
« O Damon, ma mignon fidel  
Te vel da vestrez brema. »

Damon e clevet e c'homzo  
A goll a reson querquent :  
Mar he lezet ar grill a forço.  
Devi a rei ar gouent.  
Ha vit gallout he arreti,  
Eo ret prometti deza  
Penos a deui da euraugi  
He zouc'ik Herietta.

Ar baron coz a eruas  
Evit ar brofezion :  
An amitie ze an cargaa  
Deuz a compassion.  
Ractal a deu da consenti  
D'eun heveliep allians  
Ha hep eur momet deporti  
A curun nos esperans

An dimizi ze a ve gret  
Gant cals a solennite.  
Ar guerent yaouanc pe c'ajet  
A oe assemblet neuze,  
Goude quemet deus a boaniou  
A groas hac nec'hamant,  
Oe unisset ho c'halonnou.  
Da recompans ho zourmant.

